

HARRY POTTER

ha Maen ar Furien

Renerien an dastumad : Tieri Jamet ha Lena Dupuis



Embannet gant skoazell Rannvro Breizh

Titl orin : *Harry Potter and the Philosopher's Stone*

Embannadur kentañ e Breizh-Veur e 1997

Bloomsbury Publishing Plc, Londrez

© 1997, J.K. Rowling

Harry Potter, names, characters and related indicia are copyright and trademark Warner Bros, 2000TM

ISBN 978-2-36312-008-3

© An Amzer, 2012

16 straed an Iliz, Pornizh (44)

evit an droidigezh e brezhoneg

www.an-amzer.com

J.K. Rowling

HARRY POTTER

ha Maen ar Furien

Troet diwar ar saozneg
gant Mark Kerrain

An Amzer embanner

1

Ar paotrig chomet bev

An aotrou hag an itron Dursley, a oa o chom en niverenn 4, Privet Drive, ha lorc'h a veze enne o lavarout e oant tud ordinal penn-kil-ha-troad, ho trugarekaat. Biken n'ho pije soñjet gwelout anezho o lakaat biz pe dorn e-barzh kevrin pe tra iskis ebet, rak amzer da goll n'o devoa ket gant seurt diotachoù.

An aotrou Dursley a oa rener ur gompagnunezh anvet Grunnings, hag enni e veze graet toullerezioù. Ur pezh pikol den bras a oa anezhañ, gouzoug ebet dezhañ koulz eo lavarout, evitañ da gaout melloù mourrennoù. Evit an itron Dursley a oa mistr ha meleganez, ur gouzoug he devoa, ha hennezh a oa keit ha daou, ha dre-se e oa talvoudus dezhi peogwir e tremene hec'h amzer o tic'houzougañ da sellout dreist girzhier al liorzhoù, da spiañ ouzh an amezeien. Ur mabig o devoa an aotrou hag an itron Dursley, Dudley e oa bet anvet, ha d'o meno ne oa paotr ebet par dezhañ e neblec'h.

An aotrou hag an itron Dursley o devoa kement tra a c'hallent da c'hoantaat eta, hogen ur sekred o devoa ivez, ha ne veze ket brasoc'h aon dezho eget pa soñjent e c'hallje unan bennak diskoachañ anezhañ. Kavout a rae dezho ne c'halljent ket padout ma teuje den pe zen da glevout anv eus ar Bottered. An itron Potter-se a oa c'hoar d'an itron Dursley met ne oant ket en em gavet an eil gant eben abaoe meur a vloaz e gwirionez. An itron Dursley a embanne n'he devoa c'hoar ebet

rak he c'hoar, ha pried honnezh, ul loen didalvez anezhañ, a oa ken pell diouzh bed un Dursley ha ma c'halle bezañ den war an douar. Skrijal a rae an aotrou hag an itron Dursley o soñjal petra a lavarje an amezeien ma tegouezhje d'ar Bottered dont un deiz e-barzh ar straed. An Dursleyed a ouie e oa ur mabig e ti ar Bottered ivez, biskoazh avat n'o devoa gwelet al liv anezhañ zoken. Hag ar mabig-se a oa un abeg mat all da zerc'hel ar Bottered pell diouto ; ne felle ket dezho gwelout Dudley o kaout afer gant ur bugel evel hennezh.

Pa zihunas an aotrou hag an itron Dursley d'ar Meurzh-se, an deiz ma krog hon istor, ne oa netra er-maez, war an oabl koumoulek, da reiñ da grediñ e oa traoù iskis ha kevrinus o vont da c'hoarvezout emberr e pevar c'horn ar vro. An aotrou Dursley a oa o vousekanañ en ur zibab e gravatenn, seul dris-toc'h al liv anezhi seul welloc'h dezhañ, da vont da labourat, hag an itron Dursley ne serre genoù ebet en ur stourm ouzh he Dudley vihan d'e lakaat en e gador-vugel.

Hini anezho ne daolas evezh ouzh ur mell kaouenn gell-laouret o tremen dirak ar prenestr en ur zarnijal.

Da eizh eur hanter e kemeras an aotrou Dursley e valad-dielloù, e reas ur pok d'an itron Dursley war he jod, hag e klaskas ober un añ-kimiadiñ d'e vabig Dursley, met c'hwitet e voe e daol gantañ, rak ar mabig Dursley a oa krog da fuloriñ ha da skeiñ e yod gant ar mogerioù.

– Kañfard bihan, a sklokas an aotrou Dursley p'edo o vont er-maez eus an ti.

Hag eñ da sevel en e garr ha da souzañ en alez an niverenn 4.

N'eo nemet pa erruas e korn ar straed e taolas pled e oa un dra bennak divoas o c'hoarvezout : ur c'hazh a oa o lenn ur gartenn. Ur par berr ne gomprenas ket an aotrou Dursley petra en devoa gwelet, neuze e troas e benn da sellout adarre. Ur c'hazh, roudennet e vlevenn, a oa en e sav war e baviou a-dreñv e korn Privet Drive, met hennezh ne oa kartenn ebet

gantañ. Petra eta a oa tremenet dre e soñj ? Trellet e oa bet gant ar gouloù moarvat. Ur wignadenn a reas an aotrou Dursley ha sellout adarre ouzh ar c'hazh. Hag ar c'hazh a sellas outañ. Treiñ a reas ar c'harr e korn ar straed, ha pa oa o sevel ar c'hrav e sellas an aotrou Dursley adarre ouzh ar c'hazh en e velehour. Ne oa ket o lenn an anv Privet Drive war ar banell ? Nann moarvat, o sellout ouzh ar banell an hini e oa, netra ken, ar c'hi-zhier n'ouzent ket lenn, na war gartennoù na war banelloù.

Dont ennañ e-unan a reas an aotrou Dursley en-dro ha kas ar c'hazh diwar e spered. En e garr, p'edo war e hent war-du kêr, ne soñje nemet en ur pikol urzhiad toullerezioù hag a oa gortozet en deiz-se.

Met pa erruas en ardremez kêr e teuas un dra bennak all da dennañ an toullerezioù diwar e soñj. En e goazez e oa en e garr, e-kreiz ar stankadeg kirri, evel bep beure, ha ret dezhañ teurel evezh ouzh un toullad tud tro-war-dro, rak ar re-se a oa gwisket gant dilhad iskis. Kapoù en-dro dezho. An aotrou Dursley avat ne oa ket evit gouzañv an dud gwisket en dilhad fentus. Ar re yaouank a vez dilhad droch ganto ! Ur c'hiz nevez droch all, netra ken, a gave dezhañ. O taboulinañ e oa e vizied war ar rod-stur pa baras e zaoulagad war ur bagadig oristaled hag a oa o trelatiñ hag o komz an eil e pleg skouarn egile. An aotrou Dursley a savas droug ennañ o welout e oa daou eus ar re-se ha ne oant ket gwall yaouank ken. Sellit hennezh, hag a ranke bezañ koshoc'h egetañ, hag ur c'hap glaswer emrodez en-dro dezhañ. Ma ne oa ket ur vezh ! Neuze e soñjas an aotrou Dursley e oa, moarvat, un abadenn drocherezh er straed, anat dezhañ e oa an dud-se o tastum gwenneien evit ur madober bennak... netra nemet se n'halle bezañ. Mont war-raok a reas steudad ar c'hirri adarre hag un toullad munutennoù goude e tegouezhas an aotrou Dursley e park-kirri ar gompagnunezh Grunnings, hag an toullerezioù en e spered en-dro.

Pa veze an aotrou Dursley en e goazez en e vurev, en navvet estaj, e veze troet e gein bepred ouzh ar prenestr. Anez da

se moarvat e vije bet un tamm mat diaesoc'h dezhañ lakaat e spered da soñjal e-barzh toullerezioù er beure-se. Ne welas ket ar c'haouenned o nijal a-denn-askell war-greiz an deiz. An dud war ar straed en traoñ avat a wele anezho. Chom a raent da sellout outo gant o genaouioù digor war nav eur, da ziskouez anezho gant o biz dre ma tremene an evned-noz an eil war-lerc'h egile dreist o fennoù. An darn vrasañ eus an dud-se n'o devoa ket gwelet kaouenn ebet en o buhez, na da noz zoken. An aotrou Dursley koulskoude a dremenias ur beurevezh ordinal ha digaoenn. Huchal a reas war ur pemp den bennak. Ober a reas un toullad pellgomzadennoù a bouez bras ha leuskel un nebeud blejadennoù ouzhpenn. En imor vat e oa betek koulz merenn, ha neuze e soñjas e oa poent dic'hourdañ e zivhar. Treuziñ a reas ar straed da vont da brenañ un dra bennak da zebriñ digant ar baraer en e stal en tu all.

An dremenerien en o c'hapoù a oa aet diwar e soñj abaoe ur pennad mat pa welas ur bagad all anezho e-kichen ti ar baraer. Ur sell a-dreuz a daolas outo, en ur dremen dirazo. Ne ouie ket kaer perak met diaes e veze lakaet gant ar seurt tud. Ar re-se ivez a oa e breskenn, ha chuchumuchu ganto e-leizh o genaouioù, nemet boest ebet etre o daouarn da zastum gwenneien. Pa deuas e-maez ar stal gant ur mell kouign paket en ur sac'h e klevas ur geriennoù bennak eus o c'haozioù.

– Ar Bottered, ya 'vat, setu ar pezh am eus klevet...

– Ya, o mab Harry...

A-sav krenn e chomas an aotrou Dursley. Ur barrad aon a oa krog ennañ. Sellout a reas war e giz ouzh an dud gant o chuchumuchu, evel pa vije bet darev da huchal un dra bennak dezho, met grik ne lavaras.

Treuziñ ar straed a reas, buan ha buan, adsevel d'an daoulamm betek e vurev, gourc'hemenn krak d'e sekretourez chom hep e zirenkañ, tapout krog en e bellgomz, ha ne oa ket peurc'hraet niverenn-bellgomz ar gêr gantañ pa dremenias ur soñj all dre e benn. Adlakaat a reas ar bellgomz war an daol

dirazañ, ha flourañ e vourroù. O prederiañ e oa... Sot e oa trelatiñ evel-se. Potter ne oa ket un anv ken divoutin. Kalz tud anvet Potter o devoa ur mab anvet Harry, se a oa sur.

Ha pa soñje, n'eo ket sur e oa Harry e oa anv e niz. Gwech ebet zoken n'en devoa gwelet ar bugel. Marteze eo Harvey an hini e oa. Pe Harold. Ne dalveze ket ar boan reiñ nec'hamant d'an itron Dursley, pa ne rae nemet pennfolliñ seul wech ma kleve meneg eus he c'hoar. N'halle ket rebech se dezhi. Ma en dije bet ur c'hoar evel honnezh... Koulskoude, kapoù e pep lec'h...

Un tamm diaesoc'h e kavas lakaat e spered da soñjal e-barzh an toullerezioù en enderv-se, ha pa guitaas ar savadur da bemp eur e oa ken nec'het atav ma'z eas a-benn e-barzh un den hag a oa dirak toull an nor.

– Ho tigarez, a c'hrozmolaz, tra ma oa an tamm den kozh o horjellañ, darev da gouezhañ.

Ur pennadig e voe an aotrou Dursley a-raok teurel pled e oa ur c'hap mouk war e zivskoaz. Ne oa tamm droug ebet ennañ, diouzh gwelout, goude ma oa bet darbet dezhañ bezañ taolet d'an traoñ. Er c'hontrol, ur pezh mousc'hoarzh a ranne e zremm, ha gant ur vouezh skiltr, hag a reas d'an dremenerien treiñ da sellout outañ, e laoskas :

– N'eus droug ebet, ma den mat, ha netra ne c'hallfe ma lakaat da gounnariñ hiriv. Sederait, rak Piv-Din-Me zo aet da strakal brulu. Betek Mougouled evelloc'h ivez a dleje bezañ o lidañ an devezh-mañ, biskoazh kaeroc'h, ha biskoazh brasoc'h eurvad.

Hag an hini kozh da dapout an aotrou Dursley dre e zargreiz, d'e vriata, ha kuit.

Chom a rae an aotrou Dursley evel ur peul. Briataet e oa bet gant un den dianav dezhañ a-grenn. Ur Mougoul a oa bet graet anezhañ ouzhpenn, ha se ne ouie ket petra e oa. Daoubennet e oa. Neuze e hastas mont en e garr ha yao d'ar gêr. Esper

en devoa e oa krog ar faltazi d'ober he reuz en e spered. Ar wech kentañ e oa dezhañ kaout un esper a-seurt-se. Rak gant ar faltazi ne oa ket troet-kaer.

Pa gemeras penn an alez, e niverenn 4 Privet Drive, petra a welas da gentañ, ha se ne lakaas ket anezhañ war e du mat, ma n'eo ket ar c'hazh roudennet e vlevenn en devoa spurmantet diouzh ar mintin. En e goazez e oa war moger e liorz. Sur e oa e oa ar memes kazh. Anavezout a rae anezhañ diouzh e vlevenn en-dro d'e zaoulagad.

– Chata ! a lavaras an aotrou Dursley, rust.

Fiñv ebet ne reas ar c'hazh. Ur sell garv a daolas outañ, netra ken. Daoust hag emzalc'h ordinal ur c'hazh e oa, a soñjas an aotrou Dursley. Ne oa ket o vont da zivarc'hañ abalamour d'ur c'hazh. Hag eñ en ti. Mennet e oa da chom hep ober meneg ebet a gement-se d'e wreg.

An itron Dursley he devoa tremenet un devezh didorr hag ordinal. E-pad ma oant gant o c'hoan e kontas d'he fried pegement a vec'h he deveze an amezegez gant he merc'h, ha penaos en devoa desket Dudley vihan ur ger nevez : « Meucheuc'hoant ». An aotrou Dursley a glaske en em zerc'hel evel kustum. Pa voe lakaet Dudley en e wele ez eas e dad d'ar saloñs da welout dibenn abadenn ar c'heleier noz.

– Klozomp ar c'heleier gant ar c'heloù-mañ : a bep tu, gant an evezhierien-evned, e klever anv eus kaouenned ar vro hag o deus bet un emzalc'h iskis hiriv. Peurvuiañ eo diouzh an noz e vez gwelet ar c'haouenned o chaseal, ha n'en em ziskouezont ket war an deiz. Kantadoù a destoù o deus gwelet an evned-se o nijal a bep tu abaoe ar sav-heol. Goulennet hon eus digant ar skiantourien ampartañ petra a oa kaoz d'an nevezenti-se en o doareoù da gousket ha n'int ket bet gouest da respont.

Ur skrignadenn a reas paotr ar c'heleier.

– Sed a zo kevrinus. Poent eo bremañ adkavout Jim McGuffin a zo 'vont da gomz eus an amzer arc'hoazh. Kaouadoù kaouenned a vo c'hoazh fenoz, Jim ?